

13

Edern, dre m'oa o pedi,
Oa chomet hep respont...
Mall ' voe gantan pardoni
D'ar floc'hig divergont.
Met Doue a gastizas
An dug hag e oll dud ;
Pep-hini en em gavas
Rak-tal rentet dall-put.

14

Neuze an holl, glac'haret,
A c'houlennas pardon,
Hag an dug da lavaret
Eus a greiz e galon :
« Mar vez rentet ar sklerded
D'in-me ha da va zud,
Eun iliz a vo savet
War dachenn ar burzud. »

15

Kaout a rejont ar gweled,
Dre vadelez Doue,
Lech ' ma bréman azezet
Plouedern, er gorre.
Eno eta dug Breiziz,
Hep klask eun digarez,
' Reas sevel eun iliz,
Mamm gwirion ar barrez.

16

Sant Edern a zo nijet
Pell-zo d'ar baradoz ;
Gant ar Zent, ar zentezet,
E ma ouz hor gortoz.
Heuliomp eta kalonek
An hent en deus heuliet,
Ha gant an Holl-C'halloudeg
Ni 'vezo kurunet.

Quimper, le 29 juillet 1930.

IMPRIMATUR

P. JONCOUR,


vic. gén.

KANTIK SANT EDERN

War don Kelven.

Diskan

Sant Edern, tad henniget,
Patron karantezus,
C'houi a zo bet dibabet
'Vit hon henchha nerzus :
Klevit eta hep dale
Mouez hor pedennou
Ha renit ho pugale
Betek dor an nenvou.



1

'Barz eun enezen vrudet,
He hano Iwerzon,
War fin an navet kantved
Eo ganet hor Patron.
Evel eur rozenn seder
Digor diouz ar mintin,
Ar c'hrouadurig teñer
A oa koant ha lirzin.

2

E dud a oa pinvidik
Met ive leun a feiz :
Deski 'rejont d'o mabig
Beva hervez ar reiz,
Hag Edernig hep dale,
Egiz Mab ar Werc'hez
A voe gwelet o yale
War hent ar gwir furnez.

3

Kerkent ha ma tigoras
Bleuniou e yaouankiz,
Kenavo a lavaras
Da vro Iwerzoniz,
Evit dont e Breiz-Izel
Da glask eul lec'h kuzet,
Hag ober eno brezel
D'an techou milliget.

4

Eur c'hoad bras e bro Gerne,
Peder leo diouz Kemper
A gavas dioc'h e zoare,
'Vit beva er sioulder.
El lec'h ma veler hirio
Ar bourg hanvet Eder
Ar zant a stagas dillo
Da stourm ouz an ifern

5

Pedi epad hir amzer,
En noz koulz hag en de,
Gouzanv ar riou, an domder,
Hep en em glemm morse,
Kastiza e skianchou
Didruez, dizamant
Sêtu, dre nebeut komzou,
Merket buhez ar Zant.

6

An dilhad paour a zouge
A oa eus ar rusta ;
Ar boued a gemere
A oa eus ar falla.
P'en em daole da gousket,
N'en doa evit gourvez
Nemet an douar kalet
Pe keuneud digompes.

7

Perak, o Patron karet,
Piniennou ken kriz ?
Perak beza kemeret
Eur wenoden ken striz ?
— C'hoant bras ho poa gant Jezuz,
Da danva lod er groaz...
Ha ni, pec'herien euzus,
A glask plijadur c'hoaz.

8

Eder, evel eur goulou,
A skede tro-war-dro ;
Burzudou war vurzudou
A reas dre ar vro,

Zoken e rentas buhez
D'e vioc'hig karet
Lazet gant chas didruez
Eun aotrou kounaret.

9

Met, abarz pell, e skuizas
O kutuilh enoriou :
Neuze, dre laer, e tec'has
War-zu ar menezioù,
Hag e savas evitan
Eul loch e kreiz ar spern,
El lec'h ma kaver breman
Keriaden Lannedern.

10

E kichennik e savas
Eur chapel d'ar Werc'hez
Hag enni e c'hoarvezas
Burzudou alies : :
Rak Eder oa truezus
Ouz an dud ankeniet,
Ha, dre sikour Mamm Jezuz
E rente ar iec'hed.

11

Be oa 'n e galon gristen
Kement a vadelez
Ma tirede d'e gicher
Zoken al loened gouez ;
Eur c'haro ' veze gwelet
O tont hep aon bemnoz
Da glask goudor da gousket
Ebarz e lochen gloz.

12

Dug Breiz gant chaseourien,
Hervez komz an istor,
En em gavas da dremen
Eun deiz dirag e zor.
Allas ! eur floc'h a gredas
Skei gantan divergont
Abalamour ma chomas
Eur pennad, hep respont.